

Poblañs amerikan: niverus, liesorin, liesdoare, fiñvus ha kêriekaet

I. Ur boblañs niverus ha binvidik

Sina	1360
India	1166
USA	307
Indonezia	240
Brazil	198
Pakistan	176

Diell 1: Ar 6 Stad brasañ da geñver niver a annezidi e milionoù (2009)


Renk	Stad	PDG
1	Luxembourg	80 471
2	Iwerzhon	45 500
3	Norvegia	43 574
4	USA	43 444
5	Island	40 277
6	Hong-Kong	38 127

Diell 2: Ar 6 Stad kentañ da geñver ar PDG keit-ha-keit d'ar galloud-preniñ dre annezad, e dollar, e 2005.

1. Petra eo pouez ar boblañs amerikan er bed? E Peseurt plas emañ? Diell 1
3vet plad er bed get 37 milion annezidi.....
2. Peseurt titouroù a ro deoc'h an diell 2? 4vet plas er bed evit ar PDG keit-ha-keit d(ar galloud preniñ).....
3. Sellit doc'h an diell-film àr baourantez amerikan: petra ho peus da lâr? Ur Stad pinvidik eo SUA met kalz a dizingalderioù (minorelezhioù tizhet dreist-holl).....

II. Ur boblañs fiñvus ha kêriekaet


Diell 3 Dasparzh ar boblañs e SUA e 2001



Source : US Bureau of Census; 2002

1. Peseurt linenn a zisparti an egor amerikan evit dasparzh ar boblañs? ar 100 vet hedenn a zisparti an egor amerikan
2. E men emañ ar rannvroioù get stankter ar boblañs uhel? E reter ag an hedenn 100, tro-dro al Lennoù Meur, er Megalopolis, en arvorioù (Florida, Kalifornia...).....
3. E men emañ ar rannvroioù get stankter ar boblañs izel? Penaos e c'hellit displegiñ ur boblañs ken izel en ur sellet doc'h ar gartenn hag an diell 4. Er plaennoù Meur, er Menezioù Roc'hellek. Diaesoc'h eo sachiñ an dud, skoilh naturel (an torosennadur a vez diaes da zoñvaat hag ar metier).....
4. Penaos e c'hellit displegiñ dasparzh ar boblañs amerikan en ur soñjal doc'h Istor Amerika? Digouezhet eo an diskennidi ar WASP (White Anglo-Saxon Protestant) dre ar reter é tonet a Europa. Savet eo bet industriezhioù. Ar-lerc'h ez eus bet "Conquête de l'ouest" get an Amerikaned a glaske aour.....

5. Sellit doc'h al lec'hienn ar mirdi Ellis Island e New-York(<http://www.ellisland.org/>) E men e oa dor kentañ an enbroerien a errue ar an dachennad amerikan?. **En New York e tigouezhet an Europeiz en XIXvet kantved hag e oant parket ar an enezenn Ellis Island da c'hortoz bout graet testoù enep klañvedoù, roiñ paperioù.....**



www.mytravelguide.com
Diell 4: Bryce Canyon (Utah, SUA)

Diell 5: pobladur SUA

6. Dielloù 3-5 : E men emañ ar rannvroioù degemer? E men emañ ar rannvroioù kuitaat? Perak? **Ar rannvroioù degemer e vez lec'hiet tro-dro d'ar morioù , ar talbennoù ar mor el Kalifornia , Florida. Sachiñ a ra tud plijet get an endro(hoel, mor...) hag ivez industriezhioù high-tech(ijinourien er Silicon Valley e Kalifornia. A rannvro kuitaat a vez dreist-holl biz ar vro, tro-dro ar Lennoù Meur , er Megalopolis.**

7. Diell 6: E men e vev ar muiañ an Amerikaned? **E biz ar vro.....**
8. Diell 3: roit anvioù kêrioù a-us da 15 milion a annezidi?

9. Penaos e vez anvet an tolpadur-kêrioù e Reter ar vro? **Ar Megalopolis.....**
10. Anvit pep elfenn e vez gwelet ar ar skeudenoù 7 ha 8. **Ar CBD eo ar skeudenn 8 hag ar suburbs(bannleioù penntier enne)**

11. Petra eo obererezhioù ar CBD?.
Skraberioù oabl get sezoù ar firmoù liesvroadel, karter an aferioù, bankoù, stalioù cheuc'h,.....




Diell 8: Chicago




Diell 7: suburbs e Chicago


GERIAOUEG
Ur **gbetto** : karter ur gêr vras er Stadoù-Unanet ennañ tud paour-razh, alies Morianed pe Latinos.
Karter an **aferioù** : en un tolpadur-kêrioù, ar c'harter gant an tier-bank, ar stalioù cheuc'h, sez an embregerezhioù.
Ur c'harter **anneziñ** : ur c'harter e-lec'h ez eus tud o chom, dreist-holl.



12. Deskrivet ar "suburb" amerikan: **penntier get pep ti ul liorz, ur poull-neuial, truezet get hentoù brad evit kas an annezidi betek o labour er CBD; Kartar pindivik.....**



III. Ur boblañs liesouenn ha liesorin



Diell 9

1. Leuniit ar pennad en ur sellet doc’h an diell 5:

Ur **vro enbroadur** eo SUA abaoe ar XVIIvet kantved.

An enbroerien gentañ oa WASP (White Anglo-Saxon Protestant) hag o deus kaset gete Afrikaned é tonet ag ar c’hevandir afrikan. En XIXvet kantved emañ daet annezidi a Europa en em staliñ er vro. Abaoe 1945, a orinoù Latinos hag AZIAN eo an enbroerien.

2. Perak e vez lâret e vez liesouenn ar boblañs amerikan? **Meur a orinoù disheñvel get Latinos, Tud Du, Aziiz, tud gwenn.....**

3. Piv eo ar re niverusañ? **Ar re wenn 70%.....**

4. Penaos e vez anvet ar re all? **Ar minorelezhioù.....**

Diell 10: Enbroadur Mec’hiko

Soupage de sécurité de la société mexicaine, l’émigration a permis d’alimenter l’économie américaine en main d’œuvre peu qualifiée, notamment dans le bâtiment et les travaux publics, l’industrie agro-alimentaire, le textile et l’hôtellerie. Entre 1990 et 1999, on estime à 3,5 millions le nombre de Mexicains immigrés aux Etats-Unis, soit en moyenne 350 000 par an, dont un grand nombre d’illégaux. Dans le même temps, la proportion de travailleurs clandestins dans les effectifs totaux de l’agriculture californienne est passée de 10 à 40 %. On prévoit que sur la période 2000-2020, les Hispaniques contribueront pour 44 % à l’accroissement démographique du pays et qu’ils constitueront 26 % de la population en 2050. »

Alternatives économiques, septembre 2001

5. E-barzh peseurt oberiantizoù a labour an enbroidi Latinos? Perak? **El labour-douar, el labour TP, industiezh gwiriat: labourioù a c’houlenn ul live stummadur izel.....**

6. Perak ez eus ur bochad Latinos a dremen dre guzh e SUA? **Evit kavout ul labour, kuitaat miser o stad orin. Tenniñ a ra splet an ekonomiezh amerikan a un dorn-labour marc’hadmat-tre, sentus(aon da vout denonset).....**

7. Diell 11: Daoust e c’hellomp komz doc’h **ur melting-pot?** (meskaj ar poblañsoù); **Pas peogwir n’en em veskant ket ar minorelezhioù etreze pa vez gwelet niver a euredoù etre tud a orin disheñvel.....**

Anvet eo kentoc’h « **Salad Bowl** »

Diell 11: an euredoù e SUA

